

# EUR CHANSON

## A NEVEZ COMPOSET

VOAR SUJET

D'ar groaguet pere gar lipet.

Voar ton : *Mari Mogoden.*

Pa zeo guir e m'euz amzer, plu, liou ha paper,  
Ezan da em zivertissa, da dremen va amzer,  
D'ho lakat holl da c'hoarzinn, ar re n'int ket coupabl,  
Possubl mermenz veac'h coupabl, ma e zoc'h rôsennabl. (*Bis.*)

Ne ouzon petra ober, gant noun eus fachiri,  
Birvi a ra ma goad, dre ma holl izili,  
Martreze ar re goupabl a golero ouzin,  
Hag a skolo var ma gorre, e lec'b dont da c'hoarzin. (*Bis.*)

Avanturi ran ato, credi ran fermamant,  
Vit laret ar virionnez, na veac'h ket drouk contant,  
Nep a vezoz clan e guein, certenn n'ho ouzin eas;  
Mes mac fell dezo grognai, me gonto davantaj. (*Bis.*)

Er guer ma zo cafeou, hag a zastum arc'�ant,  
Digant ar maguerezet, groagez koz ha yaouank,  
Eu eur verza cafe, cafe, du, cafe lez,  
A vagont ho bugale, ha zastumont danvez. (Bis.)

Kerkent m'antreont enn ty, d'hoc'h-tu clevit ar vreg,  
O lavaret d'ar merc'het, deut tre, deut tre, azeet,  
Ar vaguerez a lavar : buan eur banne cafe,  
Vit ma c'hellia mont d'am zi, voar dro ma bugale. (Bis.)

Neuze v  let ar vatez, font gant eur mell bolen,  
Brassoc'h eo 'vit eur skudell, kement hag eur soupieren,  
Da l  kat d'ar vaguerez, var ann dol 'ne c'highen,  
Vit ma leinio a grampoez, p'otramant a vara guenn. (Bis.)

Vit d'ar volen beza bras, darn anezo a renk  
Cavet diou veach leis unan, aroak mont en ho hent,  
Darn all zo r  zonaploc'h, goude eva eur banne,  
A c'heont enn ho rout, hag a deuio adarre. (Bis.)

Be a zo groagez yaouank, ho dese cassonni,  
Ho kemer ar volen vras, pa ve goarset enn ti,  
Mes neuze int a ev daou, elec'h eva unan,  
A certenn ann hostizez ne ve ket drouc contant. (Bis.)

Pa vez eat ar goaset kuit, neuze e lavaro,  
En eur ober eun ear gruel, me am be drouk outo,  
Voar digare kemer eun tam tan 'vit fumi,  
E teuont da velet piou ve en em regali. (Bis.)

Neuze e commando ar merc'het assamblez  
Da bikat d'eo'h ho chupen, kerkoulz ha d'ho lignez,  
N'eo'h euz met chom da zilaou, e kichen tou! an nor,  
A c'hui a velo neuze ma zoc'h den a henor. (Bis.)

Pa gomzont euz ar voazet, e laront sac'h ar guin,  
Pillier ann hostaliri, affronter pe gokinn,  
Mic'hiec ha polisson, a lavaront da zarn,  
Reder ann toulou fall, pe furcher ann davard. (Bis.)

Pez a gavan disfèçon, e mesk ar merc'het-ze,  
O chom 'bars er c'hiafeou, aliez pad an de,  
Hac ann hini ne vo ket voar o listen douguet,  
N'a pa brez'ke gant rézon, ne vo quet selaouet. (*Bis.*)

Epad ma vezont eno, varbillont rib rib rao,  
Pa gomzont euz unan benac, euz a droug comzont atao,  
Koulzgoude ma comprenfec'h, zo eun dra ne quet fall,  
Propoe'h d'eo'c'h beza en ho ty, 'vit beza ty eun all. (*Bis.*)

Abars en hostaliri, ve clevet ann douariou,  
Va hunan a m'euz guelet, ebars ar so:t plaçou,  
Ne garont na butun, na guin, sucr na cafe ;  
Devot int dreist peb-tra, ha côves reont bemde. (*Bis.*)

Ma gompreñfec'h, hostizez, certenn ho peuz tor bras,  
N'oe'h quet ho testum danvez gant ho poennou bras,  
Darn anezo goude distunia ho bolen,  
Lavarlo neuze : eman zo re zu pe re ven. (*Bis.*)

Neuze e tenyo ar vreg, pe otramant ar vatez,  
Gant eur loayadic cafe, pe eur loayadic lez,  
Neuze ne vezo quet adarre douç avoale'h,  
Koulzgoude ho fêamant, daou venec zo n'ho yalc'h. (*Bis.*)

N'em zidromplet ma den mad, ne deo ket gant cafe,  
E zastuman danvez, ha maga va bugale,  
Mes da heul ar c'hafe, me a verz ive traou all,  
Gouerza e ran boisson, bara, aman, quig sall. (*Bis.*)

Var zigare dont da guerc'hat eun tam quig pe amao,  
Ar merc'hedigou-ze a ev ar c'hafe prontamant,  
Hag a lello goude contant var zu ar guer,  
En eur lavaret d'an noac'h, Jesus, ann traou zo quer. (*Bis.*)

Ar pez vezo coustet eiz real, vezo conlet eur skoët,  
An noac'h zo sur da gredi, pa eo guir n'eus ket guelet,  
Hag evel-ze ar vreg, gant e frovision lun,  
A zo sur da gnout cafe, bemdeiz 'pad ar zizun. (*Bis.*)

---

---

# CHANSON

(116) VOAR SUJET AR MECANIKOU.

---

Voor eun ton *Gallec.*

Me ho ped, habitantet, da selaou eur chanson,  
Me a c'ha d'hi discléria bars en komzou guirion,  
Var sujet ar mecanikou, pere zo destinet  
Ebars en amser presant evit dorna aon ed.

Me a zisclério eur breuvet, hag a zo zur guirion,  
Ann hep am dislavaro, a vez eun dirézon,  
Beza zo hag a lavar, aboue ar mecanikou  
E timinu en ho irrier ann drederen ho eostou.

Tor ho deveus a guemense, tamal ar mecanik.  
Honnez, pa ve cras ann eost, ho disill maniflik,  
Ma tastumer ann eostou, vel cn amzer guechal,  
Sûi ar mecanikou, ne d'int quet da damal.

Mes beza zo eur rum tud, aboue ar mecaniko,  
A droc'h, a zastum ho eost, araog ma vez daro,  
Ma lakeier ar c'houistou, da zorna ar reze,  
A lavarjon potret al lajou : ni a renk chom adre.

Mes, allas ! ar mecanik, ne voar quet a goseal,  
Ha pa ve boutet enni, hi a guemer ractal,  
Gant re govat ed gleb, eo forcest da derri,  
Dre fors lakat enni, a deuio da succombi.

Ha neuze mestr al leur, vō elevet o laret,  
Cetu aze hor mecanik, a zo fall tremenet,  
Red a vo chench anei, kemer unan neve.  
Mar troc'het hoc'h ed en glas, e raio adare.

C'houistou ha mecanikou, certen ne dorfont quet,  
Ed a vo troc'het en glas, a dastumet en gleb.  
Dont a reont da forci, terri ar mecanikou,  
Ha grilla ann dornerien, memes var all leurion.

Ma sentsac'h demeus va avis, goude klevet va chanson,  
Discieria deoc'h eur brevvet, hag a zo guirion,  
Lezel hoc'h eost da droc'ha, quen a vezdaro,  
Sur vezint dornet mad, gant ar mecaniko.

Ann ed a vezdaro, ha dastumet en sec'h,  
A raio dispen mad, ha muioc'h direbech,  
Neuze vo plijadur elevet ar mecaniko,  
O cana 'bars el leurion, e dissilla ann eostou.

Mont a ran da ziscleria lod demeus ar boanion,  
O deveus all labourerien, ho dastum ho eostou :  
Noz ha de o labourat, n'ho deveus james repos,  
Entre ma vez mad ann amzer, evit dastum ann eost.

Ar re a zo e flani, ha ne labouront quet,  
A glese lavaret eur beden evit ar baysantet,  
A sonjal en ho soaniou, hag en de hag en noz,  
C'houi voar, evel ann holi, eo necesser ann eost.


Me zo bet vit ann eost, alies o pourmen,  
O querch'het eol ha lard vit ar mecanikerien,  
Hag a meus guelet er bourkou, calz a dod disourei,  
Dijen en amzer ann eost, p'o d'eus boued da zibri.

Mont a ran da finissa, breman va c'hanouen,  
En eur requeti mil bennos d'ar mecanikerien,  
Recouret e zomp holl gant ar mecanikou,  
Calz a dud a vije skuis ho c'heuill al lajou.

Ma fell deoc'h clévet pe oad hen eus ar c'homposer,  
Breman n'eus eiz mil devez ha pevar c'chant anter  
Abaone ma zeo ganet ebars er bed tribullus,  
Da c'hortos caout ann esperanç da vont dirac Jesus.

**FIN.**

**GUYOMARC'H, LUCAS.**



KIMIAD

# AR CHEVALIER ROLLAND

## DE BRIED IZABEL



OP

Red eo, e lavare guechal  
Rolland, pried tenez Isabel :

- « Red eo, me renk partial
- Evit mont d'ann Turki d'ar bresel ;
- Gouëla a res din-me breman,
- A kaon a res din var da veno ,
- Eud all abars nemeur aman
- A deui da sec'ha pis da zaëlou. • —

2

- « N'eo ket possobl did e vanken , »
- En eur goëla, eme Isabel , —
- « Did e vezin da virviken,
- » A pa ves maro bepred fidel ;
- » Ma zeufenn da ancounac'hat
- » Ann ini e m'eus kement caret ,
- » Ra zeui dirag va daoulagad
- » En spec̄ da reproch din va fec'het.

3

- » Mar demezan var va devez ,
  - Er banket em c'hichenn azeet ,
  - » Deut da gass ac'hanon d'ar ~~Lez~~
  - » A lavaret 'vo m' ho pried . »
- Rolland a zo maro siouas,  
Isabel e deus kaon hac ankenn ;  
Neo ker echuet mad ar blosas  
Ma teuas eur Markis d'e goulen.

4

- E renq, e c'henet, e arc'hant ,
- A zallas calon ann intavez ,
- Ref a ras e c'hounsantamant
- Hac assinet e oe an devez ;
- Ar guerent oll n'em assamblet ,
- Ar banket a gomanças souden ,
- Ne oant ket c'hoas peur azeet ,
- Eun Officer zo enu o c'hichenn .

5

- Spontus bras a re e velet ,
- Rag er guis-se guisket en ouard ,
- Evel-se tout oa goloët
- Kercouls e visach hac e zaouarn ;
- Ne greden ket sellet e faç ,
- Coulzgoude e d'oa c'hoant da velet ,
- Hac enn eb finval d'eus e blaç
- Eus Isabel a zelle parset .


Ar mab nevez kenn souezet  
Eon d'eus lavaret en eur grena :  
— « Tennit ô kasq, ia me ô ped,  
» Hac azeet ganemp da leïna ; » —  
E gasq neuze en d'eus tolet,  
O pebes orrol meurbet c'hoëro !  
Scrijal a ré tud ann heured  
Ho velet bisach eun denn maro.

En e za plom ar geanteriz  
A zelle parset eus Isabel :  
— Sell, emezan, sell ouzin piz,  
» Men eo Rolland lazet er brezel ;  
» Din-me guechall e poa prometet,  
» A pa zigouesse ganen mervel,  
» Bik'en ne kemerjes eun all  
» A din e vijac'h chomet fidel.

» Tud gentil, pa oan en buez,  
» Ouman a voa va dimezel :  
» D'euz gane-me breman d'ar bez,  
» Deud eo an heur e renkes mervel, » —  
Astenn a ra e zorn pounner,  
Caér e d'eus ernal a deplori ;  
Gant an douar e zint bet lonket,  
A c'hoas e c'hleñjac'h ho c'hirvoudi.

Ar Markis a zo chomet mantrat,  
Hac a lavar kent partial :  
— « Ma renk an oll intanvezet  
» Hirio an deiz caout seurt c'hoari,  
» Meur a zenn maro a ve guelet  
» O tont d'ober chalivari. » —

Isabel a zeu dy bep blosas,  
Guisket er c'his mont d'eureuji,  
O crial ato goassor'h goas ,  
Ar speç ne ziskrog Morse outi :  
Abaoue denn, gant aoun mervel ,  
N'eus græt demeuranç er c'hastel.



*Moulet e Montroulez, ru Brest, 36, é ty an Itron J. HASLÉ, e leac'h e caver bep seurt levriou galleg ha brezounec. — Diou chanson a nevez compost : unan voar ar Groaguet a gar lipet; eun all voar sujet Ar Mecanikou. — Guerziou ha canticou evit ar retrajou. — Buez sant Joseph, mab da Jacob. — Ar Buguel sur da dri blosas. — Collocou familier. — Disput etre an doctor hag ar buguel. — Michel Morin. — Trajedi sant Guillerm. — Almanakou galleg ha re brezounec evit ar blavez a rën — Medallennou, Croachou, Chapeledou, Taolennou, Paper, Plün, Liou, etc., etc., etc.*